

**MEULOMP HIRIE A VOUEZ UHEL**  
**Kantik evit ar Sizhun Santel**

Kalet-kaer eo kalon an den  
A chom hirie sklaset pe yen  
A chom sklaset pa wel Jezuz  
En eun doare ken truezuz

D/ Meulomp hirie a vouez uhel  
Jezuz-Krist hag e Groaz Santel !  
Meulomp hirie a vouez uhel  
Jezuz-Krist hag e Groaz Santel !

Betek ar maro e sentas  
Betek ar maro war ar Groaz :  
Eun tamm plouz, e wele kenta  
Ha koad kalet, an diweza

Mestr ar bed a zoug war e benn  
Spern dreinek evit kurunenn  
En e dreid hag en e zaouarn  
'Z eus tachou hir graet gant houarn

E galon baour a verv ennan  
Evel ar c'hoar dirak an tan  
C'houi zo gwasket, Salver Doue  
Evel ma wasker ar c'houe(z) !

Ho nerz a red evel an dour,  
Ha n'hoc'h eus digant den sikour ;  
Ouz ho sec'hed n'hoc'h eus netra  
Nemet gwin trenket da eva !

Eul laer a-zehou, eul laer a-gleiz  
Dre-holl enebourien direiz  
Hag ar pez a zo gwasoc'h c'hoaz,  
Ho Mamm dener e-tal ar Groaz !

Evet eo ar c'halir c'houero  
A oa warnan blaz ar maro  
Jezuz bremañ a bleg e benn  
'vit mervel, ha prena an den.

Eur c'hleze lemm a zo aet do(u)n  
'n e goztez, betek e galon  
Evit lakaat da zevera  
Eur berad gwad, an diweza !

O, ma Jezuz, a-raok kuitaat,  
d'ho treid me a fell din pokat,  
Starda goude ma muzellou,  
Ouz ar c'hoad sakr, ouz an tachou.

Hirie, arc'hoaz, 'hed ma buhez,  
E vevin en ho karantez :  
Mar'm eus kalon, penaoz 'c'hallfen  
Hep ho karout, Jezuz, tremen !

*Traduction à venir*